

# ta B Doulin

Tifouroù : [www.tes.bzh](http://www.tes.bzh)



Kelaouenn ar skolioù

Emañ ar gomz gant ar skolidi

Miz Meurzh 2020 • Niv. 36

## Enez-Sun



© T-Hêr Enez-Sun

Enez-Sun zo un enezenn vihan. E departamant Penn-ar-Bed emañ, a-vaez da Veg ar Raz. Daou gilometr hirder ha war-dro pemp kant metr ledander e ra an enezenn, lesanvet «Kêr» gant an enezourien, an dud zo o chom war an enez.

Evit mont di e ranker mont gant ar vag, an *Enez-Sun*, e Santez-Eved, nepell diouzh Gwaien.

War-dro 240 a dud a zo o chom war an enezenn e-pad ar goañv, ha kalz muioc'h e-pad an hañv, gant ar mor a douristed a zeu d'ober un tamm tro eno.

## Ur pennad kaoz gant Herve

### Pesketaer oc'h, mes gant piv ho poa desket ar vicher-se ?

Me 'm eus desket va micher gant va zad, pa oan krouadur, ha goude-se em eus desket gant ar besketourien all, gant ekipaj an tad, peogwir eñ en doa e vag, hag an dud kozh ma oa gantañ. Evidon 'oant kozh da neuze, daou-ugent, hanter-kant vloaz! Me am eus pevar-ugent bremañ, setu gwelout a rit! Bremañ ne c'hellan ket mui lavaret e oant kozh. Pep hini a ziskoueze din ar pezh ma ouie, ar merkoù. Bremañ ho peus GPS, setu e kavit atav e pelec'h ho peus lakaet an traoù war ar mor. Mes gwechall e ranker lakaat ur garreg war ur garreg all, pe war un tour er beg pe en ul lec'h bennak evit kavout ar plas en-dro. Desket o doa din ivez e pelec'h 'oa ar c'hornôg, e pelec'h e c'heller pesketa grilhed pe legistri.



► ur c'hрилh, grilhed



► ul legestr, legistri

### Peseurt pesked a vez kavet er mor ?

Peseurt pesked? A bep seurt, c'hwi a oar... Ni a gav mat ur pesk hag eo disteñget, mes ne vez ket gwerzhet kalz anezhañ peogwir zo re a skant warnañ... Ar gwrac'hed eo... An drein a ranker goût chukat...



► ur wrac'h, gwrac'hed

Me n'on ket jenet, me a ziskant anezho! Mes hennezh eo ar pesk ma zo, evidon, ar gwellañ. Goude-se ho peus siliou...



► ur silienn, siliou

Aze eo arru mare ar brezhilli bremañ. Ur brezhell, brezhilli.




► ur brezhell, brizhilli


### Gant peseurt ostilhoù e vez tapet pesked ?

Gant paneroù evit ar c'hranked, al legistri hag ar grilhed.

Gant higennoù e penn al linenn evit pakañ pesked zo ha gant ar roued evit pesked all. An enezourien ne implijont ket ar chalut, ar chalut zo o tistrujañ tout.



► ur baner (ur c'havell)



► un higenn

► ur roued



► Herve Guilcher o tisplegañ d'ar skoldi e vicher pesketaer.

## Ur pennad kaoz gant Nana



### Penaos e veze graet evit kaout dour?


Setu, e pep ti zo ur sitern, ganin zo ur sitern ivez, ha dour ar glav a zeu tout dre an doenn, dre ar c'han. Pa vez glav, evel-just e ruilh ar glav war an doenn, hag e ya er sitern. Ha gwechall e veze lakaet ur silienn er sitern evit derc'hel an dour prop.


### Penaos e vez graet evit ar restachoù?


Da gentañ e vez lakaet ar restachoù e-barzh seier. Goude-se e vez lakaet ar seier war an *terre-plein*, e bailhoù bras. War-lerc'h e teu un den bennak eus an ti-kêr da gerc'hat anezho evit kas anezho da-gichen ar Geveur. Dont a ra ur vag, anvet ar *Molenez*, da gerc'hat al lastez-se, goude, evit kas anezho da zeviñ da Vrest.


Ur ganaouenn kanet gant Nana ha desket gant ar skolajidi.

 *Katarina Stokolm*, ar vatimant zo anvet,  
ar vatimant zo anvet  
Hag a zo aet da goll war lostenn ar Gazeg  
Eh vigneroñ doñdoñ, eh vigneroñ doñdaine 

Hag a zo aet da goll war lostenn ar Gazeg,  
war lostenn ar Gazeg  
War ar vatimant-se, gardiened zo lakaet  
Eh vigneroñ doñdoñ, eh vigneroñ doñdaine 

War ar vatimant-se, gardiened zo lakaet,  
gardiened zo lakaet  
Gant ar gardiened, ar vatimant zo pilhet  
Eh vigneroñ doñdoñ, eh vigneroñ doñdaine 

Gant ar gardiened, ar vatimant zo pilhet,  
ar vatimant zo pilhet  
Loaioù fourchetezoù kement tra oa argantet  
Eh vigneroñ doñdoñ, eh vigneroñ doñdaine 

Loaioù fourchetezoù kement tra oa argantet,  
kement tra oa argantet  
Betek ar roeñvioù fren dre al lukarnioù klozet  
Eh vigneroñ doñdoñ, eh vigneroñ doñdaine 



► Nana o kanañ d'ar skolidi.

### Plijout a rae ar skol deoc'h?

Ya, betek ar *certificat d'étude* on bet. Da zaouzek vloaz e veze paseet ar sertiñkad. Ha goude-se, er gêr-mañ, lod a yae kuit da lec'h all da zeskiñ muioc'h, da vont uheloc'h, mes e ranker kaout moaien. Mes ni a oa paour, setu e chomed er gêr, hag a yaer da zeskiñ gwriat da di ar seurezed.

### Ar vuhez zo diaes en Enez-Sun?

Ya, n'eo ket e-giz e lec'h all, suramant. Evidon n'eo ket diaes. Pa vez lovr\* an amzer, ma n'eo ket deut ar vag, n'eus ket bet journalioù, n'eus ket bet bara, mes atav zo tud hag a glemm evit netra! N'eus ket otoioù, setu e c'heller bale. Pa vez ar mor lovr ne ranker ket paseañ war ar c'hae peogwir ar mor a lamm, hag e ranker ober intañsion.

\* lous, fall

Ul luskellerez dibunet gant Nana ha gant ar skolajidi.

Roeñv 'ta, roeñv 'ta  
Kas ar vag d'ar fes  
Ha padal ne c'hell ket mont  
Da boursu brigenen d'an intron  
Ar bleiz o vont d'ar c'hoad  
Ur minaoued en e droad  
Ur podig lastez war e benn  
Karget a silienn  
En ur lammat dreist an ti  
Aet ar c'hrog e toullig e fri!  
En ur lammat dreist an doenn  
Aet ar c'hrog e toullig e benn!



► Karreg ar *Sphinx*, anvet ivez ar *Minounok*



1

► Aze e vez gwelet tour-tan Goulenez. War-dro tri-c'hant pazenn zo e-barzh. Pignet e oamp betek al laez. Tapet hor boa ar berranal! Aze hor boa gwelet ar Chaoser, gant he miliadoù a gerreg, hag an enezenn en he fezh ivez. Brav-spontus e oa!



► Diabarzh an tour-tan.



► Ar garreg-se zo lesanvet Karreg an Aneval. Anvet eo evel-se peogwir, gwechall, e teue ar Saozon da akostiñ e-kichen traezhenn ar Gostêr. Dont a raent da glask boued ha da laerezh loened. Goude-se e laoskent ur pezh arc'hant bennak war an toull a zo war-c'horre ar garreg. Marteze e c'hellfe bezañ ur vojenn!



2

► Ar chapel Sant-Kaourantin gwelet eus beg an tour-tan.



► Miliadoù a gerreg zo e Chaoser Sun.



► Ul lodenn vras eus an enezenn gwelet eus beg an tour-tan.



3 ▶ Setu ar vilh (ar vilin), kouezhet en he foull. Gwechall e veze malet ed a veze hadet en enez, setu gwinizh, segal hag heiz. Mes pell zo ne vez kavet ed er perginier (er parkeier), en enez. Bremañ eo bet lezet tout an douaroù e fraost, ne vezont ket labouret ken.



6 ▶ An tiez a-hed Kae an Norzh, anvet c'hoazh kae ar « Paimpolais ».



4 ▶ Aze emañ ar Brêgourien, da lavaret eo ar Gomzerien. En Enez-Sun e vez lavaret *prêg* (*prezeg*) evit *komz*. Ar santimant a c'heller kaout emañ an daou beulvan o komz an eil d'egile. Setu perak int bet lesanvet ar Brêgourien. E-kichen an iliz emaint.



7 ▶ An tiez a-hed Kae ar Su, anvet c'hoazh kae ar « Français libres ».



5 ▶ Ar monumant-mañ zo bet savet en enor da vartoloded Enez-Sun aet da Vro-Saoz e miz Even 1940, galvet gant ar Jeneral de Gaulle evit kenderc'hel ar brezel ouzh Alamagn.

## Bevañ war Enez-Sun



### Enez-Vaz e-keñver Enez-Sun

Enez-Vaz zo brasoc'h eget Enez-Sun. Muioc'h a diez zo eta, mes ivez muioc'h a heñchoù, gant otoioù, ha neuze muioc'h a saotradur! Enez-Sun zo sioul-tre abalamour n'eus ket otoioù. En Enez-Vaz, gant ar wrez digaset gant ar Gulf Stream, ez eus ur jardin botanik gant plant eus pevar c'horn ar bed.

Muioc'h a dourioù-tan zo en Enez-Sun, ha brasoc'h eo tour-tan Goulenez eget tour-tan Enez-Vaz.

### Karrigelloù Enez-Sun



War ar skeudenn-se e vez gwelet ur garrigell. Implijet e vez karrigelloù gant an enezourien evit kas ar varc'hadourezh dre ar c'hanigelloù strizh. En enez, n'eus ket a heñchoù bras ha n'eus ket otoioù.



► Un tamm douar labouret e-kreiz ar raden.

## Ur pennad kaoz gant François Spinec, eus Enez-Sun

### Pet den zo o chom war an enezenn ?

N'omp ken mui leun a dud. Me 'm eus anavezet pa oan yaouank trizek kant a dud ba' Kêr. Bremañ n'omp ken mui kant ugent e-kreiz ar goañv.



© Marie-Line Quéau / Le Télégramme

► François Spinec gant Nolwenn Korbell, mamm-baeron bag savetañ Enez-Sun.

### Ha pet den zo e-pad an hañv ?

En hañv, me 'soñj din e-kreiz an hañv e tle bezañ war-dro daou vil a dud ba' Kêr. Leun a dud a deu da welout ac'hanomp.

### Pesketourien zo war an enezenn ?

Pesketourien n'omp ken mui daou, ha c'hoazh omp *retraités*. Koulskoude zo bet pesketourien en enezenn-mañ. Ur mare pa oan yaouank 'oa 350 pesketour en enezenn ha bremañ n'omp ken mui daou, gant hon bagoù er porzh. Setu an traoù o deus cheñchet.



► An hent nemetañ etre ar bourk ha tour-tan Goulenez, e beg an enezenn.

### Labourerien-douar zo war an enezenn?

Labourerien-douar n'eus ket. Amañ gwechall, tout an douar a oa labouret, pa veze leun a dud. Bremañ, an douaroù n'int ket mui labouret, tud a ra legumajoù en o jardin met mod-all, an douar n'eo ket labouret. Koulskoude eo douar mat peogwir e veze avaloù-douar mat en enezenn. Met bremañ e tlefe dont un den yaouank da labourat an douar evit kaout legumaj war an enezenn.

## Pet bag a vez bemdez?

N'eus ken ur vag, n'eus ken unan. N'eo ket graet evidomp. Ar vag zo graet ken evit tud eus a lec'h all. Ni, m'hor beus ur *rendez-vous* gant ur medisin e ranker paseal div nozvezh en tu all. Ar vag a ya kuit d'an abardaez hag emañ da bemp eur e Gwaien. Evit ur *rendez-vous* e Kemper eo re ziwezhat. Setu e ranker gedal an devezh war-lerc'h. En devezh war-lerc'h eo da nav eur hanter doc'h ar mintin ar vag. Ma peus ur *rendez-vous* da nav eur doc'h ar mintin e Kemper, 'peus ket amzer dont da gemer ur vag. Setu e ranker paseal daou devezh, div nozvezh evit dont da gaout ar medisin da skouer.



## Penaos ho peus an elektrisite amañ war an enezenn?

Moterien gant mazout, n'eus ken an dra-se. Setu an elektrisite a deu gant ar mazout. Bep bloaz e vez dispignet pase 400 tonnell mazout evit ober an elektrisite er gêr-mañ. Emeur o soñjal ober elektrisite e mod all gant ar mareoù, gant an avel ha gant an heol, ha n'eo ket an dra-se a vank en enezenn.

## Perak ho peus c'hoant cheñch an doare d'ober elektrisite?

Peogwir ni 'beus en em rentet kont emañ ar mor o tont war an douar, hag an dra-se zo gwir. Ar mor zo o tont war an douar peogwir e vez devet re a CO<sub>2</sub>. Setu ni 'lavar, ni a dev pase 400 tonnell, perak ne vefe ket klasket ober elektrisite gant an avel, gant ar mareoù ha gant an heol?




► Pa vez fall an amzer hag uhel ar mor e teu ar gwagennoù war ar straed.



► Ti-skol skolidi ar skol-vamm, ar c'hentañ-derez hag ar skolaj.

## Ur skol zo war an enezenn?

Ur skol zo evit ar vugale gant ur mestr-skol. Ur skolaj zo ivez, *Collège des îles du Ponant*, evit inizi Eusa, Molenez, Groe, Enez-Vaz. Setu ar gelennerien a deu daou devezh en un enezenn, un devezh en un enezenn all. Gant ar sistemoù nevez a zo bremañ, ar *vidéo-conférence*, e reont a-wechoù skol eus eil enezenn d'eben.



## Daoust hag e vo tud o vevañ war an enezenn c'hoazh amañ a-benn kant vloaz?

Me 'soñj din ma teufer a-benn d'ober un enezenn brop, un enezenn gant elektrisite he-unan, e vefe un enezenn gant yaouankiz a garfe dont da vevañ amañ.



► Kalz a laboused zo war an enezenn ha tud a zeu a-ratozh-kaer war an enezenn evit studial anezho.

## An treizh etre an Douar bras hag an enezenn

E-pad an treizh hon eus gwelet, a-stribourzh, Beg ar Raz gant begoù evel hini Feunteun Aod, ha perzhier evel Porzh-Loubouz pe Bestre. E Bestre (Biastre e brezhoneg an Enez) eo e teue ar vag anvet *Ar Post* da akostiñ, gwechall : kalz tostoc'h e oa evit mont betek Gwaien, mes dañjerusoc'h ivez.

Goude-se hon eus gwelet an Toull Bihan hag ar Gorleoù (anv teir c'harreg vras), hag evel-just tour-tan ar Wrac'h Vras, a-stribourzh, hag hini Tavinog, en diabell. A-raok erruout e Kêr hon eus gwelet ivez Kelaouroù, a-vabourzh (un seurt enezenn vihan stag da Enez-Sun). Paseet e oamp e-biou d'an Nerrod (ur garreg vras) a-raok erruout e-kichen ar C'hal Nevez, e Mên Brial. War-dro un eur e oa padet an treizh ganeomp. Brav e oa ar mor, un teuzer!



► O kargañ ar vag er porzh Santez-Eved a-raok loc'hañ evit an Enez.



► Tour-tan ar Wrac'h Vras.



► Porzhioù-mor bihan etre Gwaien ha Beg ar Raz.



► Enez-Sun gwelet eus ar vag.




• Beg ar Raz



► An teir c'harreg vras e Beg ar Raz.



► Tour-tan Mên Brial ha tour an iliz.



► War ar skeudenn-se e weler tour-tan Tavinog. En amzer gwechall e oa ur vojenn diwar-benn an tour-tan-se. Ar gward a oa en tour a soñje dezhañ e oa un tasmant e-barzh! E gwirionez e oa un toull er garreg, ha gant an tizh-mor e veze klevet e-giz tud o soroc'hal.

### Taboulin

ISBN 978-2-240-05268-1



9 782240 052681

Embannet gant TES (Ti-embann ar skolioù):  
tes@ac-rennes.fr — 02 56 44 01 41

**Renerez an embann:** Delphine Le Bras.  
**Kenurzhier:** Maryvonne Berthou.  
**Aozourien:** Skolajidi Pierre Stephan, Brieg.  
**«Ur pennad kaoz gant François Spinec»:**  
enrolladenn graet e 2015 gant Maryvonne Berthou  
**Tresadennoù:** Malo ar Menn.  
**Tresadenn an titl:** Gentas er Vuhé.

ISBN 978-2-240-05268-1  
ISSN 1632-9945  
W0022495

Moulet gant Evoluprint, Fenouillet (31).  
Disklêriet hervez al lezenn war ar c'hazetenniñ.  
Priz: 1€.

